



UNVANIEZH SKRIVAGNERIEN BREIZH (Association des écrivains de Bretagne)

KENSTRIVADEG SKRIVAÑ, bloavezh 2026 , e BREZHONEG

Aozet eo ar genstrivadeg-mañ gant ur spered digor. Pep skrivagner, digabestr, a c'hall ober e zibab dezhañ hervez e zoare da sellet ouzh an danvez : dre ar realouriezh, an istor, ar vredoniezh, un enklask-polis, ar skiant-faltazi, ar moliac'h, ar fent, hag all...

Ar pouezusañ eo ma vo degaset un heklef frouezhus d'an dodenn bet kinniget.

Padal, dre redi, e vo doujet ouzh ur stumm resis hag ouzh ar pajennozañ (lenn ar reoliadur gant evezh).

Reoliadur ar genstrivadeg :

Gant U.S.B. e vo aozet ur genstrivadeg skrivañ d'ar 15 a viz miz Kerzu 2025 betek an 31 a viz Mae 2026, digor d'an holl dud (18 vloaz d'an nebeutañ). Setu an dodenn (an tem) :

«Emañ un den (ur paotr, pe ur plac'h), kustumet ouzh ar savennoù-kenwuturañ, o c'hortoz an hini sañset kas anezhañ (anezhi) da penn an hent. Met ne dremeno ket pep tra evel ma oa bet rakwelet ! »

1. A drugarez da ledander ar choaz e c'hall an aozerien bezañ bleniet gant o faltazi. Rekis nemetañ, ur skrid savet diwar an dodenn.
2. Digoust eo kemer perzh er genstrivadeg. Nag izili ar juri, nag ar familh tost, na c'hallont kemer perzh enni.
3. Un destenn hepken, orin ha nevez, diembann, a vo lakaet dindan barn ar juri gant pep skrivagner.
4. E brezhoneg e vo skrivet an testennoù lakaet dindan barn ar juri. Un titl a vo dibabet gant an aozer.
 - en destenn ne vo ebarzhet skeudenn ebet nag evezhiadenn e traoñ ar bajenn.
 - mirout stumm spesadel an « danevell », ha doujañ d'he ferzhioù rekis.
 - klotañ groñs ha strizh ouzh an elfennoù meneget a-is :
 - a) Testenn moulet en mentrezh A4 - Nodrezh Times New Roman ment 12, etrelinennoù 1.5, marzoù 2,5cm. Ret eo implij ar stumm-se evit bezañ lakaet war ar renk.
 - b) Pajennoù niverennet ha titlet en traoñ hag a-zehoù eus pep pajenn.
 - c) Hirder a 2 bajenn d'ar muiañ. 30 linenn d'ar muiañ war pep pajenn.
 - d) Testenn aeret ha helenn : dilinennadoù hag etrelinennoù.
 - e) Testenn dindan dizanvegezh : war dornskrid an danevell ne vo meneg ebet, nag anv, na lesanv. Ma vefe kavet un arouez personel e vefe skarzhet kerkent an emstriver diouzh ar genstrivadeg.

Ouzhpenn, pep emstriver a lakaio a-gevret gant e destenn da vezañ kaset, en ur golo-lizher a-gostez (diz anv), ul lizher merket ennañ e anv, e zeiziad ganedigezh, e zaveennoù post, pellgomz hag elektronek mui titl an oberenn.

5. Ret e vo kas 4 skouerenn eus an destenn, moulet war baper, a-raok an 31 a viz Mae 2026, hanternoz. Ar skouerennoù-se a vo kaset da Gadoriad juri ar genstrivadeg danevelloù brezhonek :

Thierry Châtel 2, Garz al Laour bras 22780 Logivi-Plougraz

Ret e vo kas an destenn bizskrivet gant OpenOffice (pe Word), dre pezh stag, da: » thierry.chatel@laposte.net ».

Lakaet e vefe a-gostez an testennoù bet degemeret dre bostel hepken (hep doubl dre ar post). Kasit peder skwerenn baper, a-raok an deiziad dibenn.

6. An testennoù kaset evit ar genstrivadeg a vo dielfennet ha priziet gant ur juri ennañ tud eus bed an embannañ, al lennegezh hag ar sevenadur, izili pe nann-izili eus U.S.B / AEB.

Setu an dezverkoù prizidigezh : perzhioù-mat en danevelliñ, ar stil, ar reizhskrivadur, ar pajennaouzañ, dibarded an oberenn, douj ar sujed, hag he ferzhegezh e-keñver an dodenn kinniget.

7. Breutadur ar juri, oc'h en em guzuliañ gant Kadoriad ar Juri (droed gantañ ivez da vouezhiañ) a vo graet d'an 31 a viz Gouere 2026, d'an diwezatañ.

- Pep emstriver a vo kelaouet war-lerc'h, ez personel, eus ar barn a denn d'e skrid. Gant ar juri e vo dibabet 3 emstriver hag a embanno anv pep loread d'an deiz bet choazet evit an abadenn ofisiel, a vo pedet pep loread da gemer perzh enni. Pep aozet, kemeret perzh er genstrivadeg gantañ, dre un danevell bet kinniget, a vo kouviet ivez d'an abadenn-se.

Ret eo da emstriverien bet meneget evit ar gourfennadeg ober gouestl da vont d'an abadenn ofisiel lec'h ma vo roet ar prizioù (pe, e degouezh a rediezh vuiek – da gas unan bennak en e blas).

Deiziad ha lec'h abadenn ar prizioù a vo kemennet hervez un termen reizh.

Ar poltreoù hag al luc'hskeudennoù tennet da geñver an abadenn roidigezh ar prizioù a vo implijet gant U.S.B. /AEB hepken, hep ne c'hallfe an emstriverien enebañ ouzh an implij-se. En linenn e vefont lakaet, implijet ivez e framm pennadoù kazetennerezh o tanevelliñ an abadenn.

8. Ne vo ket adkaset an testennoù d'o aozerien.

9. K.S.B./ AEB a vir eviti hec'h-unan an droed da hiraat pe nullañ ar genstrivadeg hervez an niver a berzhidi ha talvoudegezh an testennoù bet resevet. An hini a gemer perzh er genstrivadeg-mañ a oar eo ret dezhañ asantiñ d'an holl divizoù bet merket er reoliadur.

10. An AEB a zo e sell da brientiñ un dastumadenn (gant ma vo bet degemeret un teskad testennoù brav) a vefe enni an teir danevell loreet mui un degad danevelloù bet plijet ar juri ganto e stumm ul levr (a vefe ennañ ivez, testennoù bet priziet e gallaoueg pe e gallaoueg)

Thierry Châtel,
Kadoriad ar juri brezhonek.

Michel Priziac,
KADORIAD UNVANIEZH SKRIVAGNERIEN BREIZH

Association des Écrivains de Bretagne

<https://www.ecrivainsbretons.org> - ecrivainsbretons@orange.fr

Siège social : 3 rue de la Loi – 56000 VANNES –

Adresse postale : AEB – 20 rue de Poul Ar Manchec – 29241 LOCQUIREC